

KIS-589 – Br. -et adanor, -et adanv

(GE da GC – 08 07 98)

E'z tanvez geriadur ar mor e troez Gl. *tourbillons à axe horizontal* dre Br. *troennoù ahelek a-zremm*.

Skrivañ a rafen kentoc'h : *ahelēt a-zremm*. E gwir, nag e *Yezhadur bras ar Brezhoneg* gant KERVELLA, nag e *Kentelioù Yezhadur SADED* ne gavan meneget an arver-se eus an adanor. Treug furmadur an droienn a intentan evel henn : 1) arver ordinal an adverb o spizañ ur verb, 2) ar verb lakaet en adanor o vont d'ober un droienn idiomatek 3) ma koll an adanor pep kefridi argerzhel, 4) ken e tiwan brizhadanorioù diwar bennanvioù. Sk. : 1) *ahelañ a-zremm ur granenn* (lakaomp), 2) *ur granenn ahelet a-zremm* (stad o tisoc'h eus un ober ahelañ, sl. Yad-9 / 13), 3) *un droenn ahelet a-zremm* (dave ebet ken d'un ober ahelañ, an droienn zo deskrivadurel rik), 4) *un den dornet hir* — er skouer-mañ ned eo ket *dornet* adanor ar verb *dornañ* (hini ebet eus sterioù ar verb-se ne gaver ennañ hag an droienn zo deskrivadurel rik), ur brizhadanor eo diwar ar pennanv *dorn* ; notomp un arver dareuladel eus an troiennoù diwar *dornet* : sk : *dornet mat* "akuit, ampart". E se, *ahelēt* en droienn *ahelēt a-zremm* a c'haller sellout evel ur brizhadanor deveret diwar ar pennanv *ahel*. E saozneg

e vez troiennoù luniet damheñvel : *red-haired, red-eyed*, gant arverioù dareuladel ivez : *red-handed* "(tapet) war an taol". E galleg ivez e kaver furmadurioù heñvel : *bien luné, mal luné*.

(GP da GE – 11 07 98)

Ober vat a rez pa savez kudenn ar "brizhadanorioù". Evit barn reizh ar gudenn eo ret, a gav din, ober un distro, ur wezh ouzhpenn war dreadingezh ar yezh. Gouzout a rez e kaver e kerneveg un adanor en *-es* kevatal d'an adanor brezhonek en *-et*, hogen n'eus tra keñveriadus ebet e kembraeg. Kenave nemet se, e vemp douget da soñjal ez eo "nevez" er yezhoù merventpredenek savidigezh un hevelep adanor.

A zo mui avat. Sevel a raed an adanor danodel en indezeuropeg gant skoazell al lostgerioù *-tó- pe *-nó- hervez ar yezhoù. Diwezhatoc'h, diwar levezon ar verboù bonadek savet nevesoc'h e tevad d'ober gant neuizioù evel *-e-to-.

War a hañval e savas diwar *-e-to-, e galianeg da skouer, ul lostger adanvel *-eto-, ken ma teuas da vezañ kemmesket, e predenegoù ar mervent, e nevezprantad ar predeneg, al lostger -/ed/, o talvout, war un dro, da adanor reol, hogen da adanv ivez.

Ac'hann furmoù brezhonek evel *dornet*, h.a. a rez anv anezhe, deveret diwar *dorn* ha neket diwar *dornañ* (a save reol un adanor *dornet* arveret abaoe ma stummad koulzoù gant ar skorverb *en devout* pe savadurioù danodel gant *bout*).

Evel henn e kejmp gant daou rummad heñvelson a neuzioù, an eil re o vezañ adanorioù (danodel en orin hogen aet da wezhodel diwar arver ar c'houlzoù skoret gant *devout* [erlec'hiet ouzh savadurioù gant *ra* + bonator, h.a., miret e kerneveg evit lod hag e kentratkembraeg]), ar re all o vezañ adanvoù deveret diwar pennanvoù dre al lostger -/ed/, lostger adanv evel -/ig/, -/eg/, -/ys/, -/edig/, h.a.

Ur fazi eo marteze enta ober anv a “vrizhadanorioù” rak adanvoù diles ez eus anezhe evite da vout heñvelson ouzh adanorioù ar merventpredenegoù.

Ar gwir ganit avat pa levez ne reer ket anv eus an anadenn-se er yezhadurioù “skolel”, koulz lavarout. Marteze a-walc'h e ve prizius kavout ur studier bennak a ve evit renabliñ hevelep deveradurioù trebennanvadel ha sevel e dezenn (degemeret “enorus meurbet gant felisitationoù ar varnerion”) evit kelav...